

DOUARNENEZ

I

En Breiz er Penn ar bed, a zo eur ger souezus ;
Gwenn a ker vel eur vreg yaouank karantezus.
Var he roc'h gourvezet, us dan dour down a glas.
Astenn a ra d'ar mor, maen-grenek he zreid-noas ;
Hag ar mor noz a deiz, rust a jentil tro dro,
A lip treid koenta ker, zo bed biskoas er vro.

Diskan :

Douarnenez, perlezen Breiz-lzel,
Paotrez ar mor, hag ar menez uhel.
Dindan da boë dispar, Ker-Is ar viliget,
E touez ar bezin teo, vit pell c'hoas zo kousket ;
N'eus en neb lec'h, eur ger evel d'out te,
Douarnenez, rozenn wenn Bro Kerne.

II

Vel en deuz graet gwech all, atao o zadou koz,
Da vibien zao d'ar mor gant ar lano beb noz.
Ebarz ar porz teval, chourig ar chadennou,
Tu an avel stignon, liennen ar bagou ;
Hag ar bagou didrous ken skanv a lapoused,
Rus sioul var an dour du, dre ar loar arc'hanted.

Diskan :

Douarnenez, perlezen Breiz-lzel,
Paotrez ar mor, hag ar menez uhel ;
Heb aoun int da vibien, en despèt d'an amzer,
Dirag an tonn treitour, holl chomont dibreder.
N'eus en neb lec'h paotred evel da re,
Douarnenez, Rozenn wenn Bro-Kerne.

III

Ar bagou zo distro, karget a besket kaer,
Ar merc'hed vid ar c'haë, deus dilezet ar ger.
An amzer zo klouar ha tomm ar c'halonnou.
Goal zo en daoulagad, c'hoarz var ar muzellou ;
Pell zo adrenv ar mor, an heol zo aet da gus,
Dre an noz sioul nij c'hoas, soniou karantezus.

Diskan :

Douarnenez, perlezen Breiz-lzel,
Paotrez ar mor, hag ar menez uhel ;
Gwazied da verc'hed deus goad eur rouanez,
Gwad mibin, gwad tanet roet d'eo gant Ahez ;
N'eus en neb lec'h merc'hed evel da re,
Douarnenez, rozenn wenn Bro-Kerne.

(Ton a son gant Yann Kerloar.)